

7

Er vrô guer demeus a Vreiz e vez güelet bemdez  
 A berz e habitantet nombr eus a larguentez :  
 Calz o deus roet sicour vit an dud maleürus ,  
 Calz vo c'hoas hac a royo , balamour da Jesus.

FIN.

\*\*\*\*\*:\*\*\*\*\*



## AN TEMPEST E MONTROULEZ HA VARDRO,

DEIZ GOUEL AR CHANDELOUR 1835.

*Var ar memes ton.*

**O** Doue oll-galloudus ! Mestr an elemantchou,  
 Cetu ni ta c'hoas hirio preiz eus an tourmantchou !  
 A hoan e zeus pévar bloas, dre ur voceü eüzus (\*),  
 E voamp-ni oll reduiset da ur stat horrerus.

Rën a ra var hor brô guer un tempest goal gounnar,  
 Hac a laqa da fremi ar môr hac an douar....  
 Petra e zeo an drous-mâ a vranl ar forestou,  
 A stracl bars er meneziou, a scrich en draonniennou ?

Perac-ta an drous hir-se, ar yuderez hep fin  
 Diouz an oll elemantchou, diouz an nos d'ar mintin ?  
 An horruplou avel bis, stringet dreist hor pennou,  
 Dindan un ênv teval dû a lanç e dempestou.

Yudal, trei ha gourdrousi a ra gant trous eüzus  
 Hac e teu da venaci dreist oll Breiz maleürus !

(\*) Ar C'holera-Morbus e 1832.

## 8

Oll gøaguenou ar môr don savet vel menezion,  
Hac en o flonjont qerqent e fonç an abimou....

Ar goez bars er c'hoajeyer, frajilet ha difframmet,  
Hac ar ravajou dre oll a ra en em velet;  
Ar grizill, ur môr a c'hlaog a güez vel un dilach,  
Hac a laqa en dro deomp qement zo en distruch.

Ar voasiouigou a zo en goasiou bras chenchet,  
Hac an oll rivierou zo tro var dro debordet.  
Lodennou bras menezion zo en em distaguet,  
Pontchou a zo destrujet, ha tyes discaret.

An oll restajou a heuil fulor an doureyer;  
Hac anfin nemet horror dre oll mui na veler,  
Ar glao, grizill hac avel en ur seurt tintamar,  
A laqa crena betec en caloun an douar.

Var ar môriou al lestri tolet ha distolet,  
A string prest var ar riblou corsou martolodet,  
Ar bed a zo menacet da zistrêi d'ar c'haos,  
Hac a seblant da vesqa hac an deiz hac an nôs.

Peür e velimp-ni ar c'halm en hor brô qer o rën,  
Hac ar boneur o tonet etouez ar Gristenien!  
Doue a visericord, ho pet ouzomp truez,  
Ha laqit an union hac ar peoc'h en hon touez.

O tempest qer spouronus! arrêtit ho furol!...  
O va brô guêr! ô natur! ô theatr a horroll!...  
O va Doue! chadennit ar tourmantchou dirol,  
Hac accordit, ni ho ped, ar c'halm bremâ demp oll.

FIN.

---

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.